

Son Meurlarvez (pour ténor) (G. Arnoux)

♩ = 112 439

5 *mf*

1 - Costât a ra Meurlarvez Ha mall eo mont d'an noz vez, Costât a ra
 Meurlarvez Ha mall eo mont d'an noz vez. Tenoz ha warc'hoaz da noz Ladi-
 ron lonli, ladi-ron lonla. Tenoz ha warc'hoaz da noz Ha g hiriziken bemdez.

- | | |
|--|---|
| <p>2. Pedel start omp da genta }
 Da vont da di yaketa } bis
 Hic debri rosh ha stripou
 Ladiron lonli, ladiron lonla,
 Hic debri rosh ha stripou
 Libzig ha gwadegennou.</p> <p>3. Fann he deus sonj displua }
 Vidomp he c'hillog kaera } bis
 Fars fourm a vo ha kouignou</p> | <p>Ladiron lonli, ladiron lonla,
 Fars fourm a vo ha kouignou,
 Eno lipimp hor mourrou.</p> <p>4. Da veurz al lard: gabadao ; } bis
 Ar yaouankis a zanso }
 Bal a zaou ha dansou-tro,
 Ladiron lonli ladiron lonla,
 Bal a zaou ha dansou-tro,
 Ha Meurlarvez a varro...</p> |
|--|---|

M^o de gazotte Danserien Kervignac (pour basse) (H. Abliz)

1. Kervignagiz an danserion la la, Kervignagiz an danserion 'ya da
 Gaudan e ou laderi la la, A ya da Gaudan d'ar pardon.

- | | |
|--|---|
| <p>2. Unh ya d'ar pardon mintin mah
 A zeu d'ar ger (bis) noz diwezah.</p> <p>3. A zeu d'ar ger noz diwezah,
 Serret e vez doriou o zad.</p> <p>4. Serret e vez prenestr ha dor,
 Ne gredont ket goulenn digor.</p> <p>5. Lakomp ar skeul vras ouz an ti,
 Ma z'ay hon daou er foenneri.</p> | <p>6. Er foenneri me ne z'in ket
 Rak dizenor vidoc'h, plac'hig.</p> <p>7. Dizenor d'ho tad ha d'ho mamm,
 Deoc'houi, plac'hig, yaouankik flamm.</p> <p>8. Dizenor d'ho preur ha d'ho c'hoar,
 Deoc'houi, plac'hig, da driouec'h vloaz.</p> <p>9. Dizenor d'ho yeontr, d'ho moereb,
 Deoc'houi, plac'hig, mez ha pec'hed.</p> |
|--|---|